

AR BIBL SANTEL

koheleth

TROIDISEZH
SANT
MAODEZ GLANNOUR
1953

083 482

AR BIBL SANTEL

koheleth

Troidigezh

gant

MAOZEL GLANNDOUR

Diocese de
Quimper & Léon
Diocese of Quimper & Léon

Document numérisé en 2016

FB

220.

591

68

BIB

1953



Sant-Brieg, 17 Kerzu 1952

NIHIL OBSTAT :

Y. Brochen,
Vikel Vras.

IMPRIMATUR :

† Armand

Eskob St.-Brieg

K O H E L E T H

+++++

RAKSKRID

Al levr hag e Oberour

Koheleth! ano divinadellus a zo bet troet gant ar gresianeg ha goude-se gant al latin dre arger Eklesiastes, an den a Iliz! Daoust hag e vefe tu da c'houzout piw a zo kuzhet dindanañ? E-pad pell eo bet sellet Salamon evel oberour al levrig: an talbenn o reiñ Koheleth evel mab David ha roue Jeruzalem, ha goude-se Koheleth e-unan, er pennadoù kentañ, o lakaat war e ano pompad ha furnez ar Roue bras, kement-se a seblante degas sklaer war ar skrid sinatur Salamon. Met hep dojetañs ebet, n'eus da welout aze nemet un ijinadenn lennegel hag ivez doug ar Yuzevion da lakaat pep oberenn a furnez dindan patroniezh ar Roue bras. An hebreeg implijet gant Koheleth a zo diwezhat, gant aramegadurioù e-leizh, ken e ranker diskenn savidigezh ar skrid, betek ar mare ma oa deuet an arameeg da vezañ ur yezh komzet en Palestina.

Moarvat ez eus da amzeriañ Koheleth war-dro dibenn ar IVvet kantved araok hor Salver, pe zoken penn kentañ an trede, goude Yob hag ar C'hrennlavarioù, met araok Ben Sirac'h.

Un oberour, pe meur a hini a dleomp kontañ? Tud'zo o deus kredet dizoleiñ el levr meur a zorn o devije, a bep eil, lezet o roudoù en destenn; hogen n'eo ket sur se. N'eus nemet ar goude-skrid 12, 9-14, ha marteze un notenn bennak ur wech an amzer, a c'hellfe bezañ eus dorn un diskibl, pe un embanner; a-hend-all ne weler ket perak n'en devije ket an oberour e-unan kempennet e levr level m'emañ.

Doare ar skrid

Rak n'eus ket da sellout ouzh Koheleth gant hor soñjoù-ni d'e varn diouzh hor boazioù-skrivañ. Ret eo hen adlakaat e kreiz un hengoun a furnez, a implij evit displegerezh ar menozioù, ar c'hrennlavarioù hag ar setañoù kenenebet. Amañ emomp pell mat diouzh poellegezh Europa. Amañ eo ur brederiadenn o'n em luskañ hep kalz a urzh, o vont hag o tont en ur ziskleriañ dimp pezh a wel: da lavarout eo darvoudoù diaes da gompren ha diaes da gevreañ kenetrezo. N'eus ket da souezhiñ eta mar chom ar menozioù a-stlabez, pa gendalc'h Koheleth e-unan da lavarout dimp n'eus ket tu da gompren dremm ar bed.

Ar soñjoù diskleriet

Enkrezet eo Koheleth gant kudenn ar vuhez. Petra 'zo? Mar me vever war an douar, nemet evit diskenn er bez goude-se, ne dalv ket ar boan, ha ned eo ar vuhez nemet kerse. Peseurt gopr a zo gant an den reizh? Sklaer eo e tleer bezañ reizh, hag e talv ar furnez muioc'h eget pec'hed ha follentez. Met n'eo ket awalc'h ar repontoù kozh diwar-benn gopridigezh ar reizhder, pa lavaront e resev an den just evurusted war an douar, hag an den fall, gwalleur ha kastiz; Nann! ar fedoù a zo a-enep, a wechoù! Neuze, petra'zo? Ret eo anzav ne gompren ket. Doue eo ar mestr, met e vennad a zo a-us d'an dud Klaskomp neuze bevañ diouzh hor gwellañ, didrabas, o kemer plijadur reizh, hep mont re war un tu pe war an tu all. Met an diskoulm-se zoken ne seblant ket respont kaer da c'hoant Koheleth. Daoust ha n'eo ket ar blijadur hec'h-unan, avel ha kerse?

Evit kompren mat hol levrig, na chomomp ket da bouezañ betek re war ul lavarenn pe lavarenn, a seblantfe a-wechoù mont re bell, betek bezañ gaouheñvel. N'eus aze nemet arguzerezh semitek. Kemeromp al levr a-bezh d'e arvestiñ en e leun. Dreist-holl, adlakomp anezhañ en e lec'h, e kerzh displegidigezh an Testamant kozh. N'eus ket c'hoazh kalz a sklerijenn war donkadur an den goude ar maro, ha sed ar pezh a zo enkreiz Koheleth.

Ne bar ket c'hoazh evit ar re reizh, na gouloù un da-
sorc'h, nag esper ur vuhez en splannder Doue. Ne wel
Koheleth nemetteñvalijenn ha kousked evit ar re varo,
teñvalijenn ha kousked hep fin. Met dija gantañ eo sa-
vet ar goulenn, goulenn ankeniet, peogwir, emezañ, ar
vuhez-mañ n'eo ket awalc'h, n'eo netra a-benn ar fin.

Ur goulenn eo Koheleth, n'eo ket ur respont. Daoust
ha pal an Testamant Kozh ne vefe ket da gentañ sevel
goulennoù, pozañ kudennoù? Ur fazi bras a vefe dista-
gañ Koheleth diouzh ar pezh a zeuio war e lerc'h.
Diwezhatoc'h e teuio ar respont, un tammig dija gant
Levr ar Furnez, met dreist-holl gant ar Salver.

Eno emañ talvoudegezh hor skrid, hep kontañ e vo da
viken komzoù ar fur-mañ ur gentel a zoare, hag e vo
mat bepred d'hon ene e selaou, da zeskiñ digantañ ned
eo ar bed-mañ nemet moged ha skeud dibad.

Rannadur ar skrid

Lavaret em eus n'eus ket da glask re a urzh en soñ-
joù Koheleth. Koulskoude o terc'hel koñt eus lavaren-
noù digeriñ ha klozañ da zistro bep ar mare, e weler
n'a ket ar menozioù d'en em heuliañ diratozh. Evel eizh
pennad a c'heller rannañ gant pep a soñj-stur, hag int
d'o zro o'n em gevreañ en diw lodenn.

Al lodenn gentañ, goude ur raklavar war an enoe, a
laka da dremen dindan hor sell, pevar abeg a gerse:

- 1) ar vuhez pompadus, huñvre sevenet gant Salamon,
- 2) Marvusted pep tra er bed, 3) doare an den er gevre-
digezh, 4) didalvoudegezh an arc'hant.

An eil lodenn a gav he raklavar diwar-benn ar fur-
nez hag ar c'hoarzh, hag adarre peder mammenn a gerse:

- 1) ar gredenn e gopridigezh ar mad er vuhez-mañ,
- 2) skorted ha distabilded ar garantez, 3) froudennoù
ar chañs, 4) donedigezh ar gozhni.

KOHELETH

+ + + + +

1. 1 Lavaroù Koheleth, mab David, roue Jeruzalem.
2 Avel an avelioù, eme Koheleth. Avel an avelioù! Avel eo pep tra! 3 Peseurt gonid a zo d'an den gant an holl boan kemeret dindan an heol?

LODENN GENTAN

- Raklavar 4 Ur remziad a dremen, ur remziad a zeu, hag an douar a chom dalc'hmat. 5 An heol a sav, an heol a ya da guzh, ha gortoz a ra betek tizhout al lec'h ma adsavo dioutañ. 6 An avel a gerzh war du ar c'hreisteiz, treiñ a ra d'an hanter-norz; treiñ-distreiñ a ra, hag adkregiñ endro gant he redadennoù. 7 An holl stêrioù a ya d'ar mor, ha n'eo ket leuniet ar mor; ha war-du al lec'h maz eont, e kendalc'h ar stêrioù da
=====
2. Avel (hebreeg hébel = c'hwezh, alan) a vez implijet amañ gant ar ster a gerse, venadurezh. Troet hon eus alies awalc'h gant kerse.

redek. 8 Un aner eo pep tra; n'hall ket an den lava -
rout n'o devije ket an daoulagad gwelet o gwalc'h nag
an divskouarn klevet e leun. 9 Rak ar pezh a zo bet eo
ar pezh a vo; ar pezh a vez graet eo ar pezh a vo
graet endro, ha n'eus mann ebet nevez dindan an heol.

10 Lakomp un dra bennak a vije lavaret diwar e benn :
"Dalc'h 'ta! Tra nevez eo kement mañ!" N'eo ket !
Dija er c'hantvedoù tremenet ez eus bet anezhañ.

11 Nemet ne van ket soñj eus an traoù a-wechall; evel
kennebeut all, en amzer da zont, n'o devo soñj ar re
a zeuio diwezhatoc'h.

Buhez 12 Me, Koheleth, a zo bet roue Israhel en Je-
Salamon ruzalem. 13 Klasket em eus imbours'hiañ ha
furchal dre ar furnez kement a vez graet dindan an
neñv. Ac'ha! ur gwall labour eo hennezh, en deus Doue
roet d'an dud da blediañ gantañ. 14 Sellet em eus ouzh
kement a vez graet dindan an heol: setu, avel eo pep
tra, ha redadenn war lerc'h avel!

15 Kement a zo kamm n'hall ket bezañ reizh,
Hag ar pezh a vank, n'hall ket bezañ kontet.

16 Lavaret em eus ennon va-unan ar c'homzoù-mañ: Ur
c'halz mat a furnez am eus, ken ez on trec'h war nep
hini a zo bet em raog en Jeruzalem. Pleustret am eus,
war furnez ha skiant e-leizh. 17 Studiet em eus gant

aked ar furnez hag an anaoudegezh, ar sotoni hag ar
follentez. Met komprenet em eus eo kement-se ivez re-
dadenn war-lerc'h avel.

18 Kalz a furnez a zo kalz a zoan;

Seul vuioc'h a skiant, seul vuioc'h a boan.

2. 1 Ha lavaret em eus em askre: Mont a ran d'en em
arnodiñ war ar blijadur. Gwel an ebatoù. Met avelach
eo se ivez. 2 Diwar-benn ar c'hoarzh em eus lavaret :
Diboellegezh! Diwar-benn ar blijadur: Da betra e
talv? Divizet em eus reiñ va c'horf d'ar gwin, tra ma
chomfe va c'halon gant ar furnez; divizet em eus en
em stagañ ouzh ar follentez evit gwelout petra 'zo mat
da vibion an dud d'ober dindan an neñv o buhez pad .
4 Graet em eus traoù bras . Savet em eus din palezioù,
plantet em eus din gwiniogoù. 5 Graet em eus din lior-
zhoù ha gwerjezioù, ha lakaet em eus enno gwez-frouezh
a bep seurt. 6 Savet em eus din stankoù-dour evit dou-
ra va flanterizoù. 7 Prenet em eus mevelion ha miti-
zhion. Tud e-leizh am eus bet em zi, tropelloù, ejened,
deñved, vuioc'h eget den ebet araozon en Jeruzalem .
8 Berniet em eus din arc'hant hag aour, pinvidigezioù
ar rouaned hag ar rannvroioù. EN em bourchaset em eus
a ganerion hag a ganerezed, a holl bombad mibion an
dud, kasedig ha kasedig. 9 Ha deuet on da vezañ bras
a-us da gement den a oa bet em raog en Jeruzalem. Ha
chom a rae ganin va furnez. 10 A gement o deus c'hoan-

taet va daoulagad, n'em eus nac'het tra ebet outo; n'em eus dioueret plijadur ebet ouzh va c'halon. Ha laouen eo bet va c'halon gant kement em eus graet: rak honnezh eo bet va stad e kement tra 'm eus embreget. 11 Met p'am eus prederiet war holl oberoù va daouarn, hag ar boan am boa kemeret ganto, setu, avel eo pep tra ha redadenn war-lerc'h avel. N'eus gonid gant tra ebet dindan an heol!

12 Prederiet em eus war ar furnez, ar sottoni hag ar follentez. Gwelomp: Petra 'raio warlerc'hiad ar Roue? Pezh 'zo bet graet dija. 13 Gwelout a ran mat ez eo ar furnez trec'h war ar follentez, kement hag an deiz war an noz: 14 rak

An den fur en deus daoulagad en e benn, met an den diskiant a gerzh en deñvalijenn. Mat! Met gouzout a ran ivez o deus an eil hag egile un hevelep fin. 15 Ha layarout a ran em askre: Tonkadur an den diskiant ha va hini eo un hevelep tra; neuze, da betra e talv va furnez? Ha lavaret em eus em c'halon eo kement-se avel ha kerse. 16 Rak ne bad ket da bell koun an den fur, ne chom ket muioc'h eget hini an den diskiant: o daou, en deizioù da zont, a vezo ankouaet. Petra'ta? Kenkoulz hag an diskiant e varv an den fur! 17 Kaz am eus ouzh ar vuhez, ha displeijout a ra din pezh a vez graet dindan an heol, rak avel eo pep tra ha redadenn war lerc'h avel. 18 Kaz am eus ouzh

kement labour am eus graet dindan an heol hag a zilezin d'am warlerc'hiad. 19 Rak piw oar daoust hag e vo fur pe foll? Ha mestr e vo war va holl labour, war gement am eus lakaet ennañ poan ha furnez dindan an heol. Ya, kement-se a zo kerse bras! 20 Setu perak on deuet d'en em zistagañ diouzh kement tra am eus embreget dindan an heol. 21 An den en deus poaniet gant furnez, skiant-vat, hag ampartiz, a lez e labour da herezh, d'an hini n'en deus graet netra ennañ. 22 Petra a van gant an den eus an holl drevell, eus an holl breder en deus en em skuizhet ganto e vuhez pad? 23 Hag an deizioù a boan, hag enkrez an aferioù, hag an nozioù digousk? Avel ha kerse.

24 N'eus neuze evit an den netra gwelloc'h eget debriñ hag evañ, ha reiñ amzer vat d'e ene e kreiz e labour! Rak gwelout a ran e teu kement-se eus dorn Doue: 25 Piw a c'hell hepdañ bevañ en puilhentez ha tañva aesamant? 26 D'an den a blij dezhañ e ro furnez, skiant ha joa; met lakaat a ra war ar pec'her ar garg da zastum ha da zaspugn evit an hini a blij da Zoue! Met kement-se c'hoazh a zo avel ha redadenn war-lerc'h avel.

Marvusted 3. 1 Da bep tra e goulz; hag evit ober pep

=====

26. Evit an hini a blij da Zoue... Gwel. Krennlavarioù 13, 22; 28, 8; Job 27, 16; h.a.

Koheleth: 3, 2 -- 3, 8

tra, ur mare dindan an neñv :

2 Ur mare evit bezañ ganet

Hag ur mare evit mervel;

Ur mare evit plantañ

Hag ur mare evit displantañ.

3 Ur mare evit lazhañ

Hag ur mare evit pareañ;

Ur mare evit distrujañ

Hag ur mare evit adsevel.

4 Ur mare evit gouelañ

Hag ur mare evit c'hoarzhin;

Ur mare evit hirvoudiñ

Hag ur mare evit ebatal.

5 Ur mare evit teurel mein

Hag ur mare evit o dastum.

Ur mare evit pokat

Hag ur mare evit chom hep pokoù.

6 Ur mare evit klask

Hag ur mare evit lezel da vont;

Ur mare evit mirout

Hag ur mare evit disteurel.

7 Ur mare evit regiñ

Hag ur mare evit gwriat;

Ur mare evit komz

Hag ur mare evit tevel.

8 Ur mare evit karout

Koheleth: 3,9 -- 3, 18

Hag ur mare evit kasaat.

Ur mare evit ar brezel

Hag ur mare evit ar peoc'h.

9 Peseurt gonid a zo d'an den gant ar pezh a ra ?

10 Sellout a ran ouzh ar vicher a ro Doue d'ober d'an dud. 11 Kement a ra Doue a glot gant e goulz, met dirak an amzervezh a-bezh, ne gomprenar ket pezh a ra Doue a-dal ar penn kentañ betek an diwezh.

12 Anavezout a ran n'eus evit an den netra gwelloc'h eget kaout plijadur hag eurvrat e-pad e vuhez. 13 Debrif hag evañ, ha tañva amzer vat e kreiz e labour: kement-se a zo donezon a-berzh Doue.

14 Anavezout a ran eo labourioù Doue traoù bet divizet gantañ evit atao ; enno n'eus netra da zegas en ouzhpenn, netra da lemel. Ha pezh a glask Doue en e oberoù eo ma vo doujet. 15 Pezh a zo, a zo bet dija; pezh a vo, a zo dija; ha pezh a venn Doue eo ar pal klasket. 16 Met sellout a ran c'hoazh pezh a dremen dindan an heol: gwelout a ran war gador ar Reizh, an Drougiezh, war gador ar Justis, ar Fallagriezh. 17 Lavarout a ran ouzhin va-unan: Doue a varno an den reizh hag an den fallakr, rak un amzer a zo amañ evit pep labour. 18 Met lavarout a ran ivez em askre eo evelse

=====

11. N'eus tu ebet da gompren mennad Doue.

15. Pezh a venn Doue eo ar pal klasket... ger evit ger : Doue a glask an hini a reder war e lerc'h. Gwerzad diaes, troet disheñvel hervez soñj pep hini.

Koheleth: 3, 19 -- 4, 4

doare an dud, dre ma fell da Zoue aprouiñ anezho da la-
kaat anat ez int evel loened an eil re evit ar re all.
19 Evit gwir, un hevelep planedenn eo hini an den hag
hini al loen: an eil a varv hag egile ivez; un hevelep
buhez evit o daou. D'an den, trec'h ebet war al loen;
rak avel eo pep tra. 20 Mont a reont o daou d'un heve-
lep lec'h; o daou ez int deuet eus ar poultr, hag o
daou a zistro d'ar poultr. 21 Piw oar hag-eñ e sav
d'an nec'h buhez an dud, hag-eñ e tiskenn d'an traoñ
dindan an douar, buhez al loened?

22 Gwelout a ran n'eus evit an den netra gwelloc'h
 eget en em laouenaat eus e oberoù: rak honnezh eo e
 lodenn. 23 Piw eta a gaso anezhañ da welout pezh a
 vezo war e lerc'h?

Doare an den 4. 1 Ha treiñ a ran bremañ da sellout
 er Gevredigezh ouzh an holl waskerezhoù a vez gra-
 et dindan an heol: setu daeroù ar
 re voustret, ha dezho frealzer ebet! Meuliñ a ran neuze
 ar re varv dija maro, kentoc'h eget ar re vev atao o
 vevañ. 3 Ha kentoc'h eget an eil re hag ar re all, an
 hini n'eo ket bet c'hoazh, ha n'en deus ket gwelet ar
 fallagriezh a vez sevenet dindan an heol.

4 Gwelout a ran ivez ned eo pep strivadenn-den ha

=====

21. Douetiñ a ra hepken KOHELETH diwar-benn ar pezh a
 zo goude ar maro; ne vo ket ken garv e zoare-lavarout
 en dibenn al levr, 12,7.

Koheleth: 4, 5 -- 4, 12

pep ijin el labour nemet erez an eil ouzh egile. Ha se
 c'hoazh a zo avel ha redadenn war-lerc'h avel.

5 Ar foll a groaz e zivrec'h

Hag en em zebr e-unan,
 a lavarar, met:

6 Gwell eo ur vozad a ziskuih

Eget diw vozad a labour

hag a redadenn war-lerc'h avel.

7 Gwelout a ran c'hoazh ur venadurezh all dindan an
 heol: 8 Lakomp un den e-unan penn, hep mab na breur;
 ha koulskoude ne gav fin ebet d'e holl labour; n'o deus
 morse e zaoulagad o gwalc'h a binvidigezh. Evit piw
 neuze e labouran hag e tioueran ar blijadur ouzh va
 ene? Kement-se c'hoazh a zo avel ha gwall vicher.

9 Gwelloc'h eo bezañ daou eget bezañ an-unan-penn,
 rak evelse ez eus muioc'h a c'honid gant al labour.
 10 Mar kouezh unan, e c'hell egile e adsevel; met gwazh
 a se d'an den a zo e-unan-penn hag a gouezhfe, neuze
 den ebet evit e adsevel! Ha mar kousker daou a-gevret,
 en em dommer; met un den e-unan, penaos e vefe tomm
 dezhañ?

12 Unan bennak a c'hell trec'hiñ war un all e-unan
 penn, met daou a zalc'ho outañ. Ur fun tri gor, a vec'h
 a dorrer.

=====

7. Venadurezh: tra ven, goullo.

12. Miret hon eus en droidigezh, ar c'hrennlavar: fun
 tri gor... a zo anezhañ un werzenn grennvrezhonek, bet

13 Gwell eo ur c'hampinod paour ha fur

Eget ur roue kozh ha sot,

ha na oar ken kemer kuzul. 14 Rak ar c'hampinod a c'hell mont er-maez eus e brizon ha gonit ar veli, evitañ da vezañ bet ganet paour er rouantelezh. 15 Gwelout a ran e holl gempredidi o vont a-du gant ar c'hampinod, an eil, ar skraper. 16 Setu-eñ penn-rener war un engroez diniver a dud. Gwazh a se mar n'eus ket goude-se da vezañ laouen gantañ! A dra sur, se 'zo kerze, ha redadenn war lerc'h avel!

17 Taol evezh ouzh da gammedoù pa'z ez d'an Templ. Tosta da selaou: hag e vo gwelloc'h da sakrifikis eget profadenn ar re ziskiant. Lakomp n'ouzont ket e reont fall. 5. 1 Na hastez ket da gomz, na rez ket buan da venoz d'ober gouestloù dirak Doue. Rak Doue 'zo en neñvoù ha te war an douar. Na vo ket stank eta da gomzoù.

2 Rak eus trabas e-leizh e tiwan hurlinkoù,

Eus e leizh a gomzoù, lavarou diskiant.

3 Mar grez ur gouestl da Zoue, hast buan d'hen seveniñ, rak ne gar ket Doue an dud dibocell: ar gouestl az po graet, kas anezhañ da benn! Kentoc'h eo dit chom hep
=====
kemeret da sturienn gant ar Vreuriezh wenn, strollad kevredigezhel stag ouzh kantual an I.V. Wir Sikour en Gwengamp, en dibenn ar grenn-amzer.

13. Ur c'hampinod, ul lampon.

ober gouestloù eget ober hep derc'hel dezho. 5 Na lez ket da c'henoù d'az kas da bec'hin, ha n'a ket goude-se da lavarout da Ael Doue n'ac'h eus ket graet a zevri kaer! Perak reiñ tro da Zoue da gonnariñ a-enep da gomzoù, ha da rivinañ oberoù da zaouarn?

6 Ober huñvreoù e-leizh a zegas kerse,

Ha re a gomzoù a zo amzer gollet.

Setu perak, az pezh doujañs ouzh Doue.

7 Mar gwelez en ur rann-vro ar paour mac'homet, ar reizh hag ar justis torret, na vezez ket souezhet! Lavaret e vo dit ez eus a-us d'ur penn bras, ur penn bras all o teurel evezh outañ hag evelse penn da benn. 8 Lavaret e vo dit e talv mad ar vro evit mad an holl, hag e tle ar vro servijout d'ar Roue.

An Arc'hant 9 An nep a gar an arc'hant ne gav ket e walc'h gantañ.

Hag an nep a gar ar pompad, n'en deus ket leve awalc'h. Sed aze c'hoazh avel ha kerse!

10 Diouzh ma kresk ar madoù

E kresk ivez niver ar grignerion.

Ha peseurt gonid d'ar perc'henn? Dudi evit e zaoulagad! 1 Dous eo kousked al labourer, pe galz pe nebeut e tebrfe; met kalon stambouc'h an den pinvidik ne lez ket anezhañ da gousket.

12 Ur gwalleur gwrizias a welan c'hoazh dindan an

heol: pinvidigezhioù miret gant o ferc'henn evit e c'haou. 13 Lakomp e koulfe ar madoù-se en un darvoud fall bennak; neuze mar bez ganet ur mab dezhañ, ne chom netra etre daouarn-hemañ. 14 En noazh eo bet ganet eus korf e vamm, da noazh e tistro; eus e labour ne denn netra a virfe etre e zaouarn. 15 Drougeur gwri-zias evitañ distreiñ da vezañ ken noazh m'eo deuet er bed ! Peseurt gonid o vezañ bet labouret evit netra? 16 Ha tremenet en devo e holl zeizioù e kreiz an du, glac'har, tregas, kleñved, konnar.

17 Gwelout a ran eta kement-mañ: an eurvad evit an den eo debriñ, evañ, ha kemer joa e kreiz an holl labour a vez embreget gantañ dindan an heol, bep ma'n em zibun an deizioù a ro Doue dezhañ: rak honnezh eo e stad. 18 Ha pa ro Doue d'an den pinvidigezhioù ha tañ-zorioù, pa lak anezhañ barrek d'o zañva, da dennañ joa diouto ha da gaout amzer vat e-kreiz e labour, kement se a zo donezon digant Doue. 19 Rak neuze n'hon eus ket koun eus deizioù hor buhez, tra ma hoal Doue hor c'halon gant ar blijadur.

6. 1 Ur gwalleur all a welan c'hoazh dindan an heol, a ra e reuz e-touez an dud. 2 Lakomp un den en deus Doue roet dezhañ pinvidigezhioù, tañ-zorioù, enorioù; ha ne vank netra d'e galon a gement a c'hellfe c'hoantaat. Met Doue ne lez ket anezhañ mestr da dennañ dudi diouto, un estren eo an hini en em vata ganto.

Sed aze kerse ha doan vras! 2 Pe lakomp c'hoazh un den en dije bet kant mab ha kement all a vere'hed, en dije bet ur vuhez hir-meurbet. Met ne gav ket eurvad gant e vadoù; ha n'en deus ket zoken ur bez dezhañ e-unan. Lavarout a ran neuze: ur sioc'han a zo gwelloc'h egetañ!

4 Deut eo en deñvalijenn,
Hag en deñvalijenn ez a kuit,
hag an deñvalijenn a c'holoio e ano!

5 N'en deus ket gwelet an heol,
N'en deus ket anavet an diskuizh.

N'eo ket stad an eil kentoc'h eget stad egile! 6 Ha goude bevañ diw wech mil bloaz, mar ne denn ket dudi eus e vadoù, daoust ha n'eont ket an eil hag egile d'un hevelep penn-termen?

7 Ne labourer nemet evit kargañ ar genoù,
Met ar poull-kalon ne gav kammed e walc'h.

8 Hag aze, peseurt gonid a zo gant an den fur war an den diboeil? Peseurt trec'h gant an ezhommeg a oar mirout an diavaezoù dirak an dud? 9 Daoust hag e ve gwelloc'h an neuz eget stad ar stomok? Kement-se c'hoazh 'zo avel ha redadenn war lerc'h avel!

8. Ger evit ger : an den ezhommeg a oar kerzhout e-touez ar re vev, da lavarout eo: a oar diskouez un neuz uhel ha seven daoust d'e baourentez.

Koheleth: 6, 10 -- 7, 5

Klozadur al 10. Pezh a zo bet dija, a anver ivez
lodenn gentañ dija dre e ano. Ha gouzout a reer petra
'zo eus an den: ne c'hell ket mont a-
enep kreñvoc'h egetañ. 11 Re a gomzoù a gresk niver
ar c'herseoù, neuze da betra 'talv? Rak piw oar petra
'zo mat d'an den en e vuhez, tra ma'n em zibun e zei-
zioù a venadurezh o tremen evel ur skeud? Ha piw a
c'hell diskleriañ d'an den pezh a c'hoarvezo war
e lerc'h er bed-mañ.

EIL LODENN

Raklavar: 7. 1 Gwelloc'h eo brud vat eget eoul-
Ar gonid diwar frond prizius; ha gwelloc'h deiz ar
ar furnez maro eget deiz ar c'hanedigezh.

2 Gwelloc'h eo mont da di ar c'hañv
eget da di ar banvez, rak eno e weler pehini eo finvezh
an dud, ha war-se en em soñj an den bev. 3 Gwelloc'h eo
ar glac'har eget ar c'hoarzh, ha mat eo un neuz garv
evit yec'hed ar galon. 4 Rak ar re fur a vez o soñj
gant ti ar c'hañv, hag ar re ziskiant gant ti ar joa.
5 Gwelloc'h eo selaou rebech an den fur eget kanaouenn
an dud diboell. 6 Rak evel strakadennoù an drein din-
dan ar chaodouron eo kanaouenn ar re ziskiant. Ha ke-

Koheleth: 7, 7 -- 7, 16

ment-se a zo avel ha kerze!

7 Ar c'hoarzh a lak ar fur da ziskiantañ,

Hag ar joa a vreign e galon.

8 Gwelloc'h eo diwezh un dra eget e benn kentañ; gwel-
loc'h eo kaout pasianted eget bezañ rok. 9 Na hast ket
d'en em chalañ, rak an trabas a gav anez en kalon ar
re ziskiant. 10 Na lavar ket: perak e oa gwelloc'h an
deizioù a wechall eget ar re a vremañ? Ne vefe ket ur
goulenn a furnez. 11 Evel un herezh eo mat ar furnez;
ur gonid ez eo evit ar re a wel an heol. 12 Rak goudor
ar furnez a dalv goudor an arc'hant; hag ar pezh a
c'honezer diwar skiant eo kement-mañ: e salv ar fur-
nez an hini a biao anezhi.

Gopridigezh ar 13 Sell ouzh oberenn Doue: piw a
vuhez war an douar c'hell digammañ ar pezh en deus
gwaret? 14 En deiz an eurvad,

bez laouen; hag en deiz ar gwalleur, taol evezh! Ober
a ra Doue kenkoulz an eil hag egile, evit ma n'ouio
ket an den petra a c'hoarvezo dezhañ en da-zont.
15 Kement-mañ am eus gwelet em buhez a gerse: an den
reizh o vervel daoust d'e reizhder, hag an den fall o
chom bev daoust d'e fallentez.

16 Na vez ket reizh betek re,

=====

7. Ar "joa", hebreeg: an donezonoù.

16. Ger evit ger: "perak en em zistrujañ?"

Ha na vez ket fur dreist-muzul,
perak en em vourreviañ?

17 Na vez ket drouk betek re,

Ha na vez ket diskiant,
perak klask mervel araok da amzer? 18 Pezh a zo mat
d'ober eo derc'hel da gement-mañ hep diskregiñ diouzh
kement-se, peogwir e ch'oarvez an eil hag egile d'an
nep en deus doujañs Doue.

19 Reiñ a ra ar furnez d'an den fur muioc'h a nerzh
egot dek gouarnour en ur gêr. 20 Met n'eus hini ebet
war an douar a ve reizh awalc'h evit ober bepred ar
mad hep pec'hiñ morse. 21 Na daol ket evezh neuze
ouzh ar brudoù, gant aon na glevjes lavarout e sko da
servijer e vallozh ouzhit! 22 Rak te, da galon a oar
pet gwech ac'h eus milliget ar re all.

23 Kement-se holl, hen aprouet am eus gant ar fur-
nez; lavaret em eus: me 'venn bezañ fur! Met hi zo
chomet dreist diraezh. 24 Re bell emañ ar pezh a zo;
don, don ez eo: piw c'hell e dizhout?

25 Poelladet am eus a galon da c'houzout, da fur-
chal, da imbours'hiñ ar furnez hag ar c'hoprigezh, da
anaout ez eo ar gwall ur follentez, hag an diskiant-
gezh un touell. 26 Ha kavet em eus c'hwervoc'h egot ar
maro: ar plac'h, dre maz eo ur pech, hag he c'halon

=====

24. Ur mister distrad eo ar gwirvoud; n'heller ket
kompren pezh a dremen.

ur roued, hag he divrec'h chadennoù!

An nep a blij da Zoue a ziflip diouzh he dalc'h,

Met ar pec'her a vez paket ganti.

27 Setu amañ pezh a gavan, eme Koheleth, pa ran ar gont
anezho holl; 28 goude-se, am eus klasket c'hoazh, met
hep ober berzh-mat:

E-touez mil paotr, ur gwaz am eus kavet,

E-touez an holl verc'hed, maonez ebet.

29 Koulskoude setu amañ pezh a gavan: Doue en deus
graet an den krouadur reizh; hemañ eo an hini a glask
troioù fall.

8. 1 Piw 'zo evel an den fur

Ha piw anavez diskoulmañ kudennoù?

Furnez an den a ro lugern d'e zremm,

Ha setu kemmet garvder e neuz.

2 Lavarout a ran: Mir urzhioù ar Roue, en abeg d'al
le graet da Zoue. 3 Na hast ket da bellaat diouto; na
chom ket aheurtet en ur wall-enkadenn; rak kement a
fell dezhañ, e c'hell hen ober; 4 mestr war pep tra
eo komz ar Roue, ha piw a lavaro dezhañ: petra rez-te?
5 An nep a vir ar gourc'hemenn ne anavo diaesamant
ebet; gouzout a ra kalon ar fur ez eus mare ha barne-
digezh. 6 Rak evit pep tra ez eus mare ha barnedigezh,

=====

8 2. Kompren marteze "al le graet gant Doue".

6. An hini a ya enep urzh ar Roue ez eus riskl bras
evitañ da vezañ kastizet, rak deuet eo da vezañ enebour

ha bras eo ar riskl a zo war an den. 7 N'anavezer ket petra c'hoarvezo; ha piw a gemenno dimp pegoulz e c'hoarvezo an dra-mañ-dra? 8 N'eus den a vefe mestr war e alan evit gallout he derc'hel, na mestr war deiz e varo. Ne roer goursez ebet d'an enebour a vrezeleir outañ, evelse n'hellfe ar fallagriezh salviñ hec'h oberour.

9 Kement-se a anavezan, dalc'het ma'm eus va soñj da sellout ouzh kement a vez graet dindan an heol, en amzer ma vestroni an den war an den, evit e zrougeur.

10 Met petra! Gwelout a ran reoù fallakr beziet gant enor; ha tud a vec'h maz int aet ermaez eus an Templ, o kanañ e kêr meuleudi da ano ar re-fall-se, evel p'o devije bevet er reizhder! Kerse eo c'hoazh kement-se! 11 Dre na vez ket sevenet diouzhtu ar setañs a-enep an droug-oberoù, eo kalon an dud leun a c'hoant d'ober an droug. 12 Petra bennak ma ra ar pec'her kant gwech ar gwall, e talc'h koulskoude da vezañ. O! An dezenn, moarvat, eo e teu an eurvad d'ar re a zouj Doue dre ma kehelont e zremm, 13 ha n'eus ket eurvad evit an den fall, n'astenno ket e zaozioù nemet e giz ur skeud, o vezañ na zouj ket dremm Doue. 14 Met darvoudoù kerseüs a zo war an douar: tud
=====
ar Roue, ha galloudek eo hemañ.

reizh e c'hoarvez dezho gouzañv pezh a verit oberoù ar re fall; ha tud fall e c'hoarvez dezho pezh a verit oberoù ar re reizh. Lavarout a ran eo an dra-se kerse!

15 Dre-se eta e veulan ar joa, o vout n'eus eurvad ebet evit an den dindan an heol, nemet gant an debriñ, an evañ, hag an ebatal. Se eo ar pezh a denno an den eus e labour en deizioù a vuhez a ro Doue dezhañ dindan an heol.

Froudennoù 16 Ha troet em eus va c'halon da anaout
ar garantez ar furnez, klasket em eus sellout pizh
ouzh ar vicher a reer war an douar: rak
an den n'eus diskuizh d'e zaoulagad na deiz na noz.

17 Prederiet em eus war hollad labour Doue: ac'hann'ta! n'heller ket dizoleiñ doare ar pezh a vez graet dindan an heol, na perak en em skuizher da glas hep gallout tizhout? Ha goudé ma lavarfe ur fur: hen gouzout a rin! ne c'hell ket hen kaout. 9.1 A dra sur am eus prederiet war gement-se holl, ha komprenne em eus emañ ar re reizh, ar re fur hag o labourioù, en dorn Doue.

Met an den ne anavez diforc'h ebet etre karantez h

=====

9.1^b. Ne anavez an den... resev karantez, pe resev kasoni a zo un hevelep tra, ken kerseüs an eil ha g egile. Reoù all a gompren evel-henn: Ne oar ket an de petra en deus da lod, pe garantez, pe gasoni.

ha bras eo ar riskl a zo war an den. 7 N'anavezer ket petra c'hoarvezo; ha piw a gemenno dimp pegoulz e c'hoarvezo an dra-mañ-dra? 8 N'eus den a vefe mestr war e alan evit gallout he derc'hel, na mestr war deiz e varo. Ne roer goursez ebet d'an enebour a vrezeleir outañ, evelse n'hellfe ar fallagriezh salviñ hec'h oberour.

9 Kement-se a anavezan, dalc'het ma'm eus va soñj da sellout ouzh kement a vez graet dindan an heol, en amzer ma vestroni an den war an den, evit e zrougeur.

10 Met petra! Gwelout a ran reoù fallakr beziñ gant enor; ha tud a vec'h maz int aet ermaez eus an Templ, o kanañ e kêr meuleudi da ano ar re-fall-se, evel p'o devije bevet er reizhder! Kerse eo c'hoazh kement-se! 11 Dre na vez ket sevenet diouzhtu ar setañ a-enep an droug-oberoù, eo kalon an dud leun a c'hoazh d'ober an droug. 12 Petra bennak ma ra ar pec'her kant gwech ar gwall, e talc'h koulskoude da vezañ. O! An dezenn, moarvat, eo e teu an eurvad d'ar re a zouj Doue dre ma kehelont e zremm, 13 ha n'eus ket eurvad evit an den fall, n'astenn ket e zaozioù nemet e giz ur skeud, o vezañ na zouj ket dremm Doue. 14 Met darvoudoù kerseüs a zo war an douar: tud
=====

ar Roue, ha galloudek eo hemañ.

reizh e c'hoarvez dezho gouzañv pezh a verit oberoù ar re fall; ha tud fall e c'hoarvez dezho pezh a verit oberoù ar re reizh. Lavarout a ran eo an dra-se kerse!

15 Dre-se eta e veulan ar joa, o vout n'eus eurvad ebet evit an den dindan an heol, nemet gant an debriñ an evañ, hag an ebatal. Se eo ar pezh a denno an den eus e labour en deizioù a vuhez a ro Doue dezhañ dindan an heol.

Froudennoù 16 Ha troet em eus va c'halon da anaout ar garantez ar furnez, klasket em eus sellout piz ouzh ar vicher a reer war an douar: rak an den n'eus diskuizh d'e zaoulagad na deiz na noz.

17 Prederiet em eus war hollad labour Doue: ac'hann'ta! n'heller ket dizoleiñ doare ar pezh a vez graet dindan an heol, na perak en em skuizher da glas hep gallout tizhout? Ha goude ma lavarfe ur fur: her gouzout a rin! ne c'hell ket hen kaout. 9. 1 A dra sur am eus prederiet war gement-se holl, ha kompren em eus emañ ar re reizh, ar re fur hag o labourioù, er dorn Doue.

Met an den ne anavez diforc'h ebet etre karantez

=====

9.1^b. Ne anavez an den... resev karantez, pe resev kasoni a zo un hevelep tra, ken kerseüs an eil ha l'egile. Reoù all a gompren evel-henn: Ne oar ket an dra petra en deus da lod, pe garantez, pe gasoni.

kasoni: rak an eil hag eben a zo kerze dirazañ.

2 Rak un hevelep tonkadur a zo d'an holl, d'an den reizh ha d'an den fallakr, d'an den glan ha d'an hini seotret, d'an hini a brof sakrifisoù ha d'an hini na ra ket; evelse eo ur seurt evit an den mat hag ar pecc'her, evit an den a ra leoù hag an hini en deus aon d'ober leoù. 3 Un droug ez eo na vefe evit an holl nemet un hevelep tonkadur e kement a vez graet dindan an heol. Setu perak eo leun a zoan kalon an den, setu perak ec'h ijiner follentezioù e-pad ar vuhez, tra-maz eer goude-se da di ar re varo. 4 Keit ha ma chomer stag ouzh ar re vev, e virer esper; gwelloc'h eo ur c'hi bev eget ul leon maro. 5 Ar re vev a oar da vihanañ e varvint, ar re varo avat n'ouzont netra. N'eus evito gopridigezh ebet, rak ankouaet eo an eñvor anezho; 6 o c'harantezioù, o c'hasonioù, o gwarizioù a zo dija aet holl da get; n'o devo ken biken, lod ebet e kement a vez graet dindan an heol.

7 Kae eta, debr er joa da vara

Hag ev da win a galon laouen,

rak Doue en deus kavet mat da oberoù.

3. Reoù all a dro evel-henn an arroud diaes-mañ: Un droug ez eo ne vefe nemet un hevelep tonkadur evit an holl e kement a vez graet dindan an heol, e vefe kalon an den leun a boan, e ve ijinet follentezioù evit ar re vev e-pad o buhez, ha da c'houde-se, evit ar re varo.

5. Da lavarout eo: ez int evel ankouaet gant Doue.

8 Gwisk e pep amzer dilhad gwenn

Ha gra na vanko ket an eoul d'az penn.

9 Tenn joa eus ar vuhez gant ar wreg a garez, a-hed ar vuhez-mañ a gerse a ro dit Doue dindan an heol, peogwir eo hennezh da lod e kreiz ar poanioù a gemerez er bed-mañ. 10 Kement a gavez d'ober, hen gra tra ma vev, rak n'eus na oberenn, na kontoù, na skiant, na furnez e chomlec'h ar re varo emañ o vont davetañ.

Froudennoù 11 En em dreñf a ran c'hoazh, hag e welan ar c'hañs kement-mañ dindan an heol: n'eo ket ar re

skañvañ a drec'h er redadenn, nag ar re greñvañ er stourm; ha n'eo ket d'ar re fur ez a ar bara; n'a d'ar re boellek, ar binvidigezh; na d'ar re ouiziek ar c'hrad vat, rak mare an drouk-chañs a zegouezh warno holl. 12 Ha ne oar ket an den peur e teuo: evel ar pesked paket er roued ganas, evel an evned tapet er pech, evelse e vez paket an den gant ar gwall-leur pa gouezh warnañ a daol-trumm.

13 Gwelout a ran c'hoazh ur gaou dindan an heol, hag a seblant din bezañ gwall-grevus: 14 ur gêr vihan a oa, nebeut a dud enni. A-enep dezhi e teuas ur Roue bras, a sezizas anezhi, a savas outi labourioù bras.

15 Met enni en em gavas un den ezhommek a oa fur hag a savetaas ar gêr gant e furnez. Met n'eus ket bet miret soñj eus an den paour-se. 16 Lavarout a ran neu-

ze; gwelloc'h eo ar furnez eget an naizh, met dibri-
zet eo furnez ar paour ha ne selaouer ket e gomzoù.

17 Lavarou habask ar re fur a vez selaouet muioc'h
eget kriadennoù Roue an dud diboell; 18 gwelloc'h eo
furnez eget armoù; met ur pec'hed war ur poent a zis-
penn kalz a vad. 10. 1 Kelion maro a gontamm ur c'ho-
pad eoul-frond; un nebeut follentez ivez a bouez mui-
oc'h eget furnez hag enor.

2 An den fur a gerzh war-eeun

Hag an den foll a ya a-dreuz.

3 Neuze pa gerzh un den foll gant an hent, e vank de-
zhañ skiant vat, hag e tiskouez d'an holl ez eo foll.

4 Mar sav a-enep dit ginadenn ar Roue, na guita ket
da blas; rak chom habask a vir diouzh e-leiz a fazioù.

5 Ur gaou a zo a welan dindan an heol, evel ur fa-
zienn a-berzh ar penn-rener: 6 ar follentez savet
d'an enorioù uhelañ, ha tud binvidik azezet en kargoù
izelek; 7 gwelout a ran sklaved o vont war varc'h, ha
priñsed o kerzhout war o zreid evel sklaved.

8 An nep a gleuz ur puñs a gouezh e-barzh,
An nep a ziskar ur voger a vez flemmet gant an naer.

9 An nep a zistag mein a vez tizhet ganto,
An nep a faout skirioù a c'hell kaout droug diouta.

10 Mar bez dall ar vouc'hal dre faot bezañ bet lem-
met he dremm, e ranker skeiñ diw wech kreñvoc'h; met
evit ober berzh eo gwelloc'h furnez. 11 Dre faot bezañ

bet achantet, mar flemm an naer, n'eus ket gonid evit
an achantour.

12 Plijout a ra pezh a lavar genoù ar re fur
Met muzelloù an den foll a gollo anezhañ.

13 Sotoni eo penn kentañ lavarou e c'henoù, ha fol-
lentez rik o fenn diwezhân. 14 An den diskiant a vergn
komzoù war gomzoù, met ne oar ket an den petra c'hoar-
vezo gantañ; ha piw a c'hell diskleriañ dezhañ petra
zegouezho war e lerc'h?

15 Labour ar re ziboell a enoe anezho;

N'hall ket mont da gêr an hini n'anav ket an hent.

16 Gwa te, ar Vro a zo ur bugel he roue hag a vez
he friñsed enni o tebriñ a-dal ar heure! 17 Evurus ar
vro a zo he roue mab noblañsoù, a vez he friñsed o te-
briñ pa'z eo ar c'houlz, evit adkavout nerzh ha n'eo
ket evit en em rein d'an evach.

18 Da heul leziregezh e kouezh an treust,
Ha gant tud didalvez e ra glav e-barzh an ti.

19 Met daoust ha n'eo ket evit c'hoarzin e reer
predoù? Hag ar gwin a laouena ar vuhez, n'eo ket ta!
Hag an arc'hant a respont da bep tra!

20 Zoken en diabarzh da soñj hepken, na villigez
ket ar Roue;

Zoken en da gambr-kousket, na villigez ket an den
=====

19. Ar gwerzad a hañval menegiñ an digarezioù a glasker
ganto gwennañ renerion lezirek ha lontek.

Koheleth: 11, 1 -- 11, 8

pinvidik ! rak an evn a gas gantañ ar brudoù, hag an teodadoù a gav diwaskell da vont.

11. 1 Sko da vara war zremm an dour, ha goude kalz amzer e adkavi anezhañ. 2 Ro ul lod anezhañ da seizh pe da eizh, rak n'ouzout ket peseurt gwallleur 'a c'hell degouezhout war an douar. 3 Pa'z eo ar c'houmoul leun a c'hlay, e skuilhont anezhañ war an douar. Pe er c'hreisteiz pe en hanter-norz e kouezhfe ar wezenn, e-lec'h ma kouezh e chom.

4 An nep a sell ouzh an avel, ne had ket;

Ha pa seller ouzh ar c'houmoul, ne veder ket.

5 Evel n'ouzout ket hent an avel, na penaos en em stumm eskern ar bugel en eskre e vamm, evelse ne c'hellez anavout labour Doue, oberour pep tra.

6 A-dal ar beure, had da c'hreun;

Ha d'an noz, na lez ket da zorn da ziskuizhañ.

Rak n'ouzout ket eus daou dra pehini a zeuio da vat, pe daoust ha ne vefent ket ken mat o daou.

Donedigezh 7 Dous eo ar sklerijenn, hag ur blijadur
ar gozhni eo d'an daoulagad gwelout an heol. 8 Mar
chom bev an den bloavezhioù e-leizh, ra
denno joa diouto holl, ha ra soñjo e vo niverus an

=====

11. 1 Marteze ez eus ano amañ eus ar c'henwerzh
war vor.

Koheleth: 11, 9 -- 12, 5

deizioù a denvalijenn : avel ha kerse eo kement a
c'hoarvez.

9 Den yaouank, en em laouena ez yaouankiz,

Ha ra vo evurus da galon en deizioù da oad-flamm.

Heuilh hentoù da galon,

Ha c'hoantoù da zaoulagad!

Met anav e vi galvet gant Doue da vezañ barnet war
gement-se.

10 Pella diouzh da galon an doan,

Ha diouzh da gorf, kas kuit ar boan!

Met avel ha kerse eo yaouankiz ha oad flamm. 12. 1 Az
pez soñj eus da Grouer en deizioù da yaouankiz araok
ma teuio an deizioù fall, ma tegouezho ar bloavezhioù
a lavari diwar o fenn; ne blijont ket din! 2 Araok ma
teñvalaio an heol hag ar sklerijenn, al loar hag ar
stered, ha ma teuio endro ar c'houmoul goude ar glav;

3 en deiz ma kren gwarded an ti,

ma kromm an dud nerzhus,

ma paouez ar merc'hed a valañ,

dre maz a kuit an deiz er prenestroù,

4 ha m'eo serret war ar ru daou stalaf an nor;

pa gouezh mouezh ar vreo,

pa beuez geiz al labous,

ha pa dav ar c'hanennoù,

5 d'ar c'houlz ma sponter rak ur c'hray,

ha ma trealaner gant an hent.

Koheleth: 12, 6 -- 12, 14

Hag en he bleûnv emañ an alamandezenn,

Hag e kav al lamperez he gwalc'h,

Hag e ro ar gaprezenn he frouezh,

e keit ha maz a an den davet e di a beurbadelezh!

Hag e tro dija al leñverion er straed...

6 Araok ma torro an neudenn arc'hant,

Ma'n em vruzhuno ar greuzoul aour,

Ma vo brevet ar pod dour er feunteun,

Ma tiskrogo ar pole 'us d'ar puñs,

7 ha ma tistroy ar poultr d'an douar evel m'eo deuet
dioutañ, hag ar vuhez da Zoue en deus roet anezhi.

8 Avel an avelioù, eme Koheleth, avel eo pep tra!

Goude-skrid 9 Ouzhpenn ma voe Koheleth un den fur,
en deus c'hoazh kelennet d'ar bobl ar
skiant. Pouezet en deus, keñveriet ha reizhet ur d'halz
a grennlavarioù. 10 Klasket en deus Koheleth sevel kom-
zoù d'ydus ha skrivañ rik soñjezoù a wirionez.

11 Evel broudoù eb lavaroù ar furion, hag o dastuma-
doù evel tachoù plantet. Roet e vezont gant un hevelep
mesaer.

12 Ouzhpenn-se, va mab, desk ez eo sevel levrioù ul
labour hep diwezh, hag ez eo kalz a studi skuizhder
evit ar c'horf. 13 Diwezh al lavar. Klevet eo bet pep
tra. Douj Doue ha mir e c'hourc'hemennoù, sed aze dever
pep den. 14 Rak Doue a c'halv dirak e lez-varn an holl
oberoù, gant kement a zo kuzh, pe vad, pe fall.

Liesskrivet e Ti Mari J. MOULIN
22, rtraed Gurban, 22
ROAZHON

